



# CHANSON

## POTRET PLOUILLAU.

Var ton : *Adieu, Pontrëo.*

**M'**AM bije speret da gompren, evel a meus  
 fantazi,  
 Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi  
 Eur c'himiât leun eus a c'hlac'har, grêt da gons-  
 crivet yaouanq  
 O deust tennetâr billet du ebars er blaves presant.  
 Ebars er bla mile iscant c'hoec'h, ar bempa vis  
 guengolo,  
 E zeo digueet adare eus a baros Plouillau  
 Tud yaouanq evit an arme, tud eus ar re der-  
 rupla;  
 Glac'haret ê o oll ligne, p'o guelont o partia.  
 Dabartiagant an actif ne zeus qen nemet pêvar:  
 Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar  
 Meledar,  
 Ha yannic Prateus ar Goajou ha Pipi an Aveant:  
 Pêvar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud  
 vaillant.  
 Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad:  
 Emâ a zo un devez trist hac a ra din calonad!

Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qez  
desolet!

Va c'halonice barse em c'hreiz zo dija qazirannet.

Calz a sonchfe dê, marteze, penos e ven ur  
poltron,

Em be aon rac un ten fuzuil pe rac ur vouled  
canon,

P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an  
hentchou,

Pe gousqet var ur guele can ebars er c'horde-  
gardou,

Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha  
va zabren,

Bale bemde a guêr da guêr dre ar fanq hac ar  
vouillen;

Ha goude e fin va beach rancout marteze campi,

Pe gousqet var an douar yen, pe otramant bi-  
voaqi.

Tor o deus an neb a sonch se; ma c'halent  
lenn em c'halon

Evit guelet va bolonte ha va inclination;

Mana fotfe nemet va goad, me en scuillfe tout  
joaüs

Evit souten hon Impalaër, un tad qer caran-  
tezus!

Piou na gombatfe qet hardi gant un Impalaër  
christen?

Ur gaus qer just hac e hini a zo facil da zouten,

Pa zomp memprou da Jesus-Christ, soudarded  
 an Aviel,  
 Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-  
 Santel.

Arça eta, camaradet, qent quittat eus hor  
 c'hontre,

Demp-ni da ilis Plouïllau da suplia hon Doue  
 D'or preservi demeus goal chanç pa vezimp en  
 armeou,

Ha da gonsoli bars er guêr hon tadou hac hor  
 mamou,

Adieu dêc'h, Autrou Sant Millan, patron eus  
 ar baros-mâ;

Adieu, qerent ha mignonet, cessit brêmâ da  
 vouela:

Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet  
 c'hanomp, daret.

Hachon Æl-mad d'hor c'hunduo partout  
 ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperanç, eme an tau  
 dezolet;

Piou a gonsolo da dud paour goudema vi partiet?  
 Pa vin accablet gant cosni, me vo clêvet o laret:

Ma vije va mab qèz er guêr, en dije va soulajet.

Clêvit ar vam o qimiadi ive digant e buguel:  
 Deus amâ c'hoas ma c'hambassin ur vech qent  
 eguet mervel;

Aben ma retornid'ar guêr me vo êt eus ar bed-mâ

Deus amân e tre va divrec'h evit ar vech diveza.  
 A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet  
 d'ar billet,  
 Bemnos vel ma fot dia cousquet, me a seblant  
 da velet  
 O tont'eus eur gombat sanglant, var eur chariot  
 blesset,  
 Pe tolet en eun hôspital, gant an oll abandonet,  
 Ar soudard yaouanq contristet, c'hoas qent  
 eguet partia,  
 Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur vouela:  
 Tavit, va zad ha va mam baour, ha bevit en  
 esperanc:  
 Done, tad a visericord, a so bras e brovidanç.  
 Goude avo fin d'ar brezel hagoneet ar victoar,  
 Goude Doue hac ar Verc'hes, e vezo fin d'ho  
 lar;  
 Erq'eus hor vaillantis, gant lore deus hon  
 tocou,  
 Ne zitroyo prest d'ar guêr evit sec'hi ho taelou.  
 Adieu da baros Plouillau ha d'eoll habitantet,  
 Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha qerent, ha  
 mignonet:  
 Ha ma na memp qet ar boneur er bed-mâ d'en  
 em velet,  
 Graç deomp ebars er barados assambles d'en  
 em gavet.

FIN.



## GUERZ

VAR SUJET DISTRO UN DEN YAOUANQ

PARTIET GANT AR GUENTA REQUISITION.

Var ton : *Va Flaneden zo caled.*

**T**OСТАIT oll, tud yaouanq, ha qemerit true  
 Ouz ar blaneden bonner a boez var va bue;  
 Deut da guemesq ho taelou assambles gant va re,  
 Da zoulaji va foanniou, deut da voela varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zòn bet contraignet  
 D'abandoni va c'herent, va douç, va mignonet,  
 Evit monet d'ar brezel da zouguen an armo  
 E faveur al liberte voa promet d'am bro.

Abaoue qeit all amzer, n'alfen qet lavaret  
 Pet combat ha pet poanniou a meus-me andaret.  
 Tri c'hant leo an separe eus va c'herent nessa,  
 Ha na meus bet diouto qelou an distera.

E creiz ar c'harnach bemde va buez exposet,  
 Unan demeus va diouvrec'h erfin a meus collet,  
 Hac evit oll recompanç e meus bet va c'honje,  
 Hep receo nep pansion da veva em c'hontre.

C'hoas laouen o filezel servich ar Republik,  
 N'en deo qet deut va speret da gompren er fatiq  
 Eus an hent hir ha poannius am boas me da ober  
 Aroc guelet va zud qer hac eruout er stad.

Collet e meus ar gallout da rei sicour <sup>remc</sup> ~~remc~~ zad,  
 Hac o tivoeret va brec'h, n'allin mui ~~remc~~ <sup>remc</sup> remc  
 Brêmâ va zud am mago, pa meus-me c'hoar ar chang  
 M'o deus leve hac arc'hant ebars en abondanç.

Cetu me dija êru tostic demeus ar guêr ;  
 Gant ar joa ouz va güelet an oll a ray din cher,  
 Va zad, va mam, va c'herent, breudeur ha c'hoarzet  
 Ha va mestrezic fidel, a vo oll ravisset.

Bonjour dêc'h, ô va c'hontre ! eurus en em gavân  
 Gallout c'hoas ho contempli, dont da vervel amân.  
 Va c'halon gant ar joa vras em c'hreiz zo seziet  
 O tostat demeus an ty el lec'h m'ôn bet ganet.

Mes, oc'h antreal enni, e zôn bet trubuillet,  
 Un den dianav din-me en deus din lavaret :  
 Eruet fall oc'h amân ; sortiit, va mignon ;  
 Ne mâ get ar mestr er guêr, n'ho po get aluzon.

Souezet bras o velet n'anaveyen hini  
 Touez qenlies personach a voa o rên en ty,  
 E meus-me prest respontet : ententit va rêson,  
 Me n'en don get deut amâ da glasq an aluzon.

Clasq a rân va c'herent qer er plaç m'ôn bet ganet ;  
 Al lec'h-mâ a zo dezo, amâ òn bet maguet.  
 Lavarit din, me ho ped, pelêc'h en o c'havin :  
 Ne zefot netra qen din evit va c'hontantîn.

An den-mâ a zo follet, int commancet crial :  
 N'en dê get mab d'hor mestr-ni ; ret eo er chasseal.  
 Güelet ho pije neuze eur vanden mevellyen  
 O tiredec gant bizier d'am chasseal souden.

O sortial gant glac'har ha beuzet em daelou,  
 Da glasq va zud êlec'h all, pe clêvet o c'hêlou,  
 En hent e zôn bet scòet vel gant eun tol curun,  
 Pa meus-me anaveet voa collet hor fortun.

Souden e meus rancontret va c'hoar ar yaouanqa,  
 Eur zac'hic staguêt outi, o c'houlén e bara.  
 O clasq eun ar maleur varnomp-ni digüezet,  
 Va spen go bet troublet, ha va c'halon mantret.

O Doue oll-buissant ! roit din hoc'h asistanc,  
 Roit din an nerz da glêvet penos ho Providanc

E devez bet permetet , evit va c'hastia ,  
Ma zomp-ni bet reduiset er stat an horrupla !

Va c'hoaric paour, me ho ped, soulajit va mizer ;  
Hast bras a meus da glêvet qêlou deus va zad qer ,  
Hac eus ar vamic tener e devez hor savet :  
Mervel a ràn en defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas dit, va breuric paour! ne oufes qet compren  
Peguen bras eo hor maleur, peguer bras hon anqen...  
Allas! ouspen hor madou a renqomp divoeret :  
Hor c'herent carantezus zo bet deomp ravisset.

En despet d'al lezennou grêt gant ar Republiq,  
Hon tad voa chommet fidel d'an Ilis Catholiq ;  
Rac-se gant an tirantet e zeo bet condaonet  
Da bignat var ar chaffot vit beza dibennet.

Prestic goude, hor madou a zo bet confisqet ,  
Hac ive, prestic goude, siouas! int bet guerzet ,  
Consumet gant ar chagrin deus qement a gollo ,  
Hor mam a zo bet neuze scòet gant ar maro.

Cessit, va c'hoar, da barlant ; cessit d'am dezoli,  
Re a meus var an douar a dourmant hac anui ,  
Er moment mac'h esperen commaç beva eurus,  
En em gavàn , va Doue! muyoc'h-muy maleurus.

Goude beza servichet ar Republiq ingrat ,  
E deus, d'am recompanci, guillotinet vad zad,  
Laqet va mam da vervel dre nerz an dizesper ,  
Ha guerzet va oll vadou; n'em bo nemet mizer.

\*Diouz an tourmantchou garo a stourm ous va speret,  
Pelec'h caout soulajamant, pelec'h cavet remed?  
Ar plac'h e deus captivet a bel va zantimant  
A zoulajo va hirvoud gant e c'homzou charmant.

Varzu ty va mestrezic e zàn gant esperaç  
Caout en e fidelite remed eus va zouffraaç :  
Bonjour dêc'h, va rouanez; cetu me deut er vro :  
Ancouêt eo va oll boanniou, mar am c'harit atao.

Me zo FANCHIC, ho mignon, distro eus ar brezel,  
 Hac a so en peb amzer c'hommet d'êc'h-u fidel.  
 Demeus va oll garantez ebars en hoc'h andret  
 E meus bremâ esperanç beza recompancet.

Petra, paour qêz reuzeudic! clasqit-u em c'hever ?  
 Biscoas ne meus ho quelet, na deziret ober ;  
 Biscoas ne meus ho caret, na birviquen n'er gràn,  
 Ha cefu, en bêt gomzou, ho setanç diveza.

Me zo an den maleurus, ne gafet qet e bar.  
 Mil guech milliguet an heur m'on deut var an douar!  
 Oll gouliou va c'halon zo nêve digoret,  
 O veza bet rebutet gant va muya caret.

Va mestrez ouz va gûelet couezet en paourente,  
 Nijet e fromessaou, nijet e c'harante  
 Esperanç va eurusted, allas! zo tremenet  
 Evel ma ra un ure en nôs dre hor speret.

An exempl-mâ, tud youand, a deu d'oc'h instrui  
 Peguen dister ar bed-mâ, leun a ingrateri ;  
 Epad ma zoc'h pinvidiq, gant an oll oc'h caret ;  
 Mes mar tro rod ar fortun... adieu ar mignonet!

Petra ràn var an douar? collet va mam, va zad,  
 Va mestrez ha va madou, va brec'h da labourat :  
 O vervel pe o veva er c'hoad gant al loëned,  
 Rin guell egnet implori amâ faus mignonet!

Er c'boajou an tevalla o tont d'en em guzat,  
 Maguet vin gant va glac'har, hac eus va daoulagad  
 E tiredo an daelou da drec'hi va zec'hed,  
 Betec ar moment eurus ma quitaïn ar bed.

En despet d'an injustiç a eprouvàn hirio,  
 Me bedo a greiz calon evit boneur va brô :  
 O va Doue! deurvezit renta, dre ho puissanç,  
 Ar boneur, al liberte d'am brô guêr eus a Franç.

---

E Montroulez, e ty A. LÉDAN, ru ar Pavé.